

Kefridi skrijus Flatters

* * *

Jean Jacques Flatters, ur c'hizeller brudet deus departamant ar Mayenne a oa tad Paul Flatters. Pa erruas e lise Laval edo dija emzivad ar c'hrennard. Studioù dreist en doa graet an den yaouank, e-leizh keneiled padus en dro dezhañ, pa zimezas diwezhatoc'h gant ar plac'h Legros, c'hoar da unan eus e gendiskibli. Ar bempvet edo bet resevet e Saint-Cyr e 1851.

Gant 39 den e loc'has Paul Flatters diouzh Ouargla ar pemp a viz Meurzh 1880. Etrezek ar su e stagent da vont, hogen, un diouer a vevañs ha gourdrouzoù ar bobl tro-dro dezhe, edont rediet da zistreiñ diouzh o hent. Distroet da Ouargla ar seizhtek a viz Mae hep bezañ bet graet a-grenn o c'hefridi ; kelaouadurioù prizius gante memestra.

Daoust d'an difenn ha d'ar gourdrouzoù gouestlet dezhe gant mestr an D/Touareged : Ahitarel ag Mohamed Biska, abalamour en doa hemañ nac'het groñs d'ar strollad armet tremen war e zomani, e tivizas koulskoude Paul Flatters mont en dro.

Ar pevar a viz Kerzu 1880 eta, e kemerent hent ar Sahara evit an eilvet ergerzhadeg, 93 den enni. En o-zouez seizh den o labourat war ar skiantoù ha meur a zoudard, Joseph Pobéguin bet ganet e Klegereg gante ; 47 tennataer eus bro Aljeria, 31 Arab eus ar meuriadoù tost, seizh den blenier oc'h anavout ar vro hag ar yezh, ur mokedem diouzh urzh an Tidjani. Setu ma oa tost da zaou gant ha pevar ugent aneval gante (kañvaled, kezeg, azened) hag ur yalc'had aour talvoudus-tre. E-pad daou viz araokadenn ne gavas ar skipailh diaezamant ebet war e hent. Siwazh e Bir-el-Gharama ec'h echuas sioulder an ergerzhadenn ma vezint kazi holl peuzflastret gant an D/Touareged.

Stign “puñs an truaj”

Diouzh an tu kleiz e oa an heol o parañ war an dezerzh, hag o splannañ ar c'hedourien difiñv. Menezioù an Hoggar war an dremmwel a gemerent tamm-ha-tamm ul liv peuzroz. Berr-tre edo bet an noz, re verr evit an diskuizh rekis d'an dud kement ha d'al loened bet o kerzhout dizehan an deizioù kent. Ur predig-amzer ziwezhatoc'h, an holl dud o tastum o feadra a daolas un hibouderezh a vevder er c'hamp. An ofiserien a dremenent diouzh ur gevrenn d'eben dre hastañ war an diloc'hañ. Goude ur frapad amzer da renkañ an holl draoù e krogas ar strollad gant an dibunañ levioù.

Ar rener, ar c'horonal Flatters, gant ar preder, en devoa hanter gousket. Abaoe pemp deiz, ar garavanenn n'he doa kavet puñs ebet war he hent, setu ma tigreske ar pourveziadur dour. Dre guzulig an dud a gomze deus an D/Touareged o lavarout ne vije ket gouzañvet gant ar re-mañ treuziñ digastiz ha diriskl o bro. Hogen, o mennozh d'ar re bennañ edo embregañ diriskl an heol loskus kement hag an tennoù-hent hir-divi, se hepken a gonte evite. Soñjal war enebouriezh an D/Touareged edo un dra zister, droch, gant o fourveziou-brezel puilh a-enep da c'hoafioù ne vefe ket bet diaes dezhe o zrec'hiñ. Padal, ret e vefe bet d'ar vistri sentiñ ouzh ar c'hedourien, hogen, evel ma vez c'hoazh bev ar mod-se n'oa ket ur feson d'ober. Ar vistri ne blegont ket d'ar re vunut, na petra 'ta ! An tonkad euzhus bet kinniget dezhe diagent ne gouezhfe ket diwarne, kentoc'h war an D/Touareged e vefe.

Kuitaet gantañ Ouargla ar pevar a viz Kerzu 1880 en doa ar strollad, daou viz diwezhatoc'h kollet e holl stok gant an norzh. Heuliet e oa bet ar stêr Mya betek Hassi-Inifel ha tizhet ar gêriadenn anvet Amguid. Adalek Inzimane-Thikhsine en doa bet ar strollad an tu da gas an diwezhañ keloù davet Ouargla.

Goude kabaduilh ar bloaz tremenet, ar c'hannadurezh edo e bal anavezadenniñ un eil gwech an endro evit kavout an tremen an hini gwellañ d'un hent-houarn a deuje diouzh Afrika an norzh betek an Afrika drovanel.

Gant he zrizek ha pevar-ugent den, edo ar garavanenn vrezel an hini niverusañ bet biskoazh enlakaet da dreuziñ ar Sahara : dek ha pevar ugent mehara, kant nav ha daou ugent kañval o tougata pevar miz boued, dour, pourveziou-brezel, donezonou tonket da dud ar Soudan.

Dindan e urzh en doa ar c'horonal Flatters daou ofiser : ar c'hapiten Masson hag al letanant Dinaous. Ambrouget e oant gant ar medisin Guiard, an ijinerien Béranger, Roche ha Santin ma oa karget ar re-mañ gant kuzul-enklask an hentoù-houarn da zstum a-zivout lec'hiadurezh an tremen, sklaeridigezhioù evit goude aesaat al labourioù. Daou zoudard all, ar serjanted Dennery ha Pobéguin, ur c'heginer Marjolet ha Brame kentañ soudard-mevel da Flatters o c'hourc'hemenn seizh ha daou ugent tennataer Algerian hag unan ha tregont kañvaler diouzh meuriadoù Chaamba ha Oulad-Naïl enebourien douet ouzh an D/Touareged dibaoe kantvedoù. Un den relijius, ar mokedem a heulie an ergerzhadeg.

Ar pevar a viz C'hwevrer e chome dezhe daou zevezh kerzhed kent tizhout an dolzenn zivent maen-greun anvet an Hoggar. Un ambrouger en doa roet da c'houzout e kavfent duhont an dour rekis da vont larkoc'h.

Un arsav edo bet divizet ober antronoz ouzh troad ar menez Atakor. Ret e oa d'ar vandennad, tud ha loened, adkavout ar puñs aroueziet e-touez ar c'hrec'hioù niverus. Darn eus an dud a anve ar puñs Hassi-Tadjenout, darn all Bir-el-Gharama, da lavarout "puñs an truaj". D'an ampoent nikun ne arware pegen pounner e vije bet an truaj da baeañ d'an dezerzh.

Flatters a roas da anavezout ec'h urzhioù, rannet edo bet an dud e teir lodenn. Al letanant Dinaous, an ijiner Santin hag ar serjant Pobéguin a daolfe pled ouzh teltennoù ar c'hamp skoazellet gant daou ugent den. Ar gañvalerien dindan urzhioù ar serjant Dennery a vlenfe al loened trema ar puñs e-sell leuniañ ar mirlec'hioù deus an dourenn brizius rekis. Ar c'hapiten Masson, an daou ijiner all, ar medisin Guiard afent en o raok gant ar c'horonal.

Div eur ziwezhatoc'h, ar serjant Dennery, ambrouget gant ugent den o ren un daou gant kañval bennak, a gemeras penn un trepas ouzh troad an devenn.

Ragarmead ar c'horonal deuet a-benn erfin da dizhout ur savenn dastrewet enni gwezigoù dister ha treut ne gavas netra war he hent da virout ouzh an araokadenn. Ar zavenn valirek a-us da veur a gelc'hva livus ne zedennent ket selloù an dud. Pledet aketus ma oa ar re-mañ gant an diribin diaes-kenañ kerzhout ennañ etrezek ar ganienn.

Diouzh tu Dennery hag e dud, goude un eurvezh kerzhed faezhus, e verzent er pellder, e naoz ur stêrig, glasvez tro-dro dezhi, ar c'horonal Flatters, ar c'hapiten Masson o reiñ dorn d'an dud da naetaat ar puñs, bez' e oa e-leizh dispennadurioù ennañ ; e-keit ha m'edo e kichennig an ijinerien hag ar medisin o tisheoliañ dindan ar gwez. A-daol-trumm e welas Dennery chomet pelloc'hig e-kichenn, meur a-unan deus ec'h ambrougerien oc'h ober ur sailh herrus ha prim war o c'hezeg hag o vont d'ar pevarlamm, hep urzh un ofiser bennak. Hag e oas un trubarderezh ? Hag-eñ e welent un enebour bennak ? Enkrezet, ar serjant a gemeras e fuzuilh, kerkent e pignas ur safar displann diouzh torioù ar stankenn, evel pa vije bet un armead didrouz ha diwelus o tostaat. A greiz-holl, ur vandennad Touareged, o tifoupañ a-ziwar ar bodoù stank, mouchet gante o dremmoù, goafioù en o daouarn, a reas un dilammadenn herrus gant ar pouez-traoñ etrezek ar puñs dindan daoulagad sabatuet Dennery, un tri c'hant Touareg bennak en argad. An daou ijiner, ar medisin a voe dic'houzouget kent dezhe bezañ bet amzer d'en em zifenn gant o fistolennoù-tro. An dud o naetaat ar puñs a dec'has, pres warne, da gavout ur goudor bennaket. Flatters ha Masson a choment o daou, diraze tud iskis, yudadennoù hakr gante. Seul taol gant o fistolennoù-tro e kouezhe unan anezhe, hogen, gant an niverus ma oa ar re-mañ, buan edont bet toullet ha didoullet gant ar goafioù ; an argaderien e diouer bezañ par da Zoue, edont dreist d'an diaoul !

Dalc'het ma oa an arsailherien gant dibourc'hañ ar c'horfoù marv ha tapout ar gañvaled n'o doa ket c'hoazh merzet bezañs Dennery m'edo hemañ o tiskenn trema ar puñs. Erruet hed-taol e fuzuilh e roas urzh d'e varc'h en em astenn evit dezhañ kaout ur warez a-dreñv korf al loen. Kalz enebourien edont bet foeltret gantañ, met pa oa bet spisverket an den,

o doa an argaderien staget gant krapadenn zerzh an tor. Tennañ a glever dalc'hmat, arsailherien a gouezhe stankoc'h-stankañ met, en e gerzh e vihanae ar boledoù en e sac'h-tennoù. War-nes tennañ an diwezhañ boled edo pa dreuzas e gorzailhenn ur goafig-bann. An ambrougerien manet war an uhelenn keit an amzer-se o doa ur boan-vras o terc'hel war o loened pennfollet pa fronelle ar re-mañ an dour tostig-tre. Gant ar sec'hed, harz ebet ne virfe oute da vont d'an daoulamm betek ar puñs ; setu-int etre daouarn an D/Touareged.

Derou ar giladeg

Ar gward-adreñv koulskoude, dindan urzhioù El Madani, ar jubennour, he doa klevet an dennadeg. Ur c'hañvaler diviet, spouronet a gemenn dezhe al lazhadeg bet sevenet gant an D/Touareged. Hep koll amzer e skoas El Madani war gañvaled e strollad evit o lakaat da zistreiñ diouzh hent ar puñs bet kemeret gante diagent. O welout o freizh o pellaat en em strink war o lerc'h un dornad enebourien pignet war beb a gañval dindan tennoù El Madani hag e re, korfoù Touareged a gouezhe amañ hag a-hont, ken fuloret ma oant e kendalc'he darn oute war droad gant ar spi enkelc'hiañ ar strollad. Deus strollad El Madani e kouezh nav den en o foull. O wellout an doare bet kemeret gant an emgann hag evit saveteiñ o buhez, an daouzek den all a ro d'ar c'hañvaled o dieubidigezh dedennet ma oant gant c'hwez an dour. Kerkent daouarn an D/Touareged war al loened hag e kendalc'hent betek ar puñs da adkavout o re.

Da deir eur d'enderv El Madani hag e dud a verze ar c'hamp war an dremmwel, skuizh-marv ma oant oc'h ober kement hent war droad. Al letanant Dinaous, bet kemennet dezhañ an emgann, skoazellet gant ugent den a 'z eas en arbenn dezhe. Distroet d'ar c'hamp, war-lerc'h bezañ bet e reizhet a-wel diouzh ur seziz e tivizent mont en dro war lec'h al lazhadeg evit esaeañ saveteiñ ar re vac'hagnet. Hag-eñ e oa anezhe ? Goude bezañ heuliet war api an hent trema an puñs, ne gavent nemet korfoù marv ha kazi dibezhiet. Esper ebet da gavout un den bennak manet bev e tistroas Dinaous d'ar c'hamp.

Liesañ edo bet ar c'hedourien tro-dro d'ar c'hamp, an noz sklasus o tostaat, an oabl steredennet o c'hronnañ al lec'h glac'harus, n'edont ket evit sioulaat ar pennoù. Al letanant Dinaous dre heg kentoc'h eget dre gaer deuet pennrener war an dud en dro dezhañ a vod an ijiner Santin, ar serjant Pobéguin, El Madani hag ar mokedem evit kenaozañ, en em guzuliañ war an diviz da gemer. Diouzh lavar El Madani ne oa dañjer nag arvar ebet e-pad an nozvezhioù, an D/Touareged o toujañ ar strollad ma oa hemañ gouestoc'h d'en em zifenn egete. Da greiznoz, echuet gant ar vodadenn, graet ar steuñv hag an dibab. Ar giladeg e vefe ar poellekañ tra d'ober, n'edo nemet ur pal er pennoù, lakaat hed ar muiañ posupl etreze hag an D/Touareged. Pep den a gemerfe boued ha dour kement ha ma c'hellfe kas gantañ. Ne chome nemet c'hwec'h den ha hanter kant ken er strollad prest da gregiñ gant ar gerzhadenn zivoutin hag arvarus.

Evit distreiñ da Ouargla e ranker kerzhout war droad daou viz hanter ! 1400 kilometr ! Dizale setu ar strollad o kemer penn an hent davet an norzh. E-kerz an noz an derez-gwrez aotree d'an dud kerzhout hep diwaskañ re, a-walc'h a bouezaj o doa da zougen, ar fuzuilhoù, an tennoù, ar sec'hier-lêr leun dour enne. Da boent tarzh-an-deiz, un ehanig da ziskuizh an divesker faezhiet. Goude un tamm hag ul lonkadenn, kerkent en hent en desped d'an derez-gwrez oc'h uhelaat dic'houzañvus.

An ugent a viz C'hwevrer e tiskoachas unan eus ar spierien roudoù an D/Touareged ma kerzhe ar re-mañ a-stur gant ar strollad. Nec'hus-tre edo ar c'heloù. Sioul, mestr an enebourien a c'hortoze pe an ampoent a-du gantañ, pe al lec'h choazet gantañ da stagañ adarre gant an emgann, diarvar m'edo an amzer kevredad gantañ. Aes e vefe dezhañ flastrañ e gwanidigezh an diouer, ar strollad.

Kentañ post da dizhout edo Temassint, lec'h m'he doa ar Gefridi graet un ehan pa oant o tont etrezek ar su. Du-hont e kavfent an *dhanoum*, ur blantenn, war a lavarar, a dorrfe ar sec'hed. Diouzh jederezh Dinaous ne chome nemet tri deiz bevañs : meur a zornad datez hag ul lodennig bleud. Goude-se e vefe ar blaennenn Amadghor enoenu ha marteze strafuilhus da dreuziñ, an dezerzh e lec'h na ziwannetra.

An unan war ugent a viz C'hwevrer edo bet roet keal gant ar spierien o kerzhout kenstur gant ar skipailh edo atav roudoù diwar an D/Touareged, war-dro daou gant edont. El Madani gant pemp Chaamba, a 'z eas da ober ur sell da D/Temassint ha dreist-holl d'ar puñs. Da greistez ec'h erruas peurrest ar strollad. Ur pennad diskuizh d'an dud da reiñ dezhe kalon evit kenderc'hel gant an distro poanius hag ankenius. Eskern an daou gañval bet lazhet abaoe daou zeiz a oa bet losket ha pilet munut da ober ur seurt bleudenn, krec'hin an daou loen bet poazhet, rostet ha didammet a-benn bezañ debret da gargañ un disterig stomok an dud marnaoniet. Eizh eur kerzhed o doa d'ober kent erruout e plaennenn Amadghor en em led homañ betek Amguid. El Madani a roas da c'houzout e oant dic'houest d'ober treizhadenn an dezerzh hep bevañs fonnus ; setu ma oant rediet d'ober un huadeg. Da goulz ar gerzhadeg davet ar su edo bet gwelet azened gouez en tachad-bro-mañ. Al letanant edo bet ret dezhañ klask e-touez ar re yac'husañ, ar re ouestañ, meur a zen da dapout al loened. Eus an dibab edo bet an hemolc'h. E gwirionez n'edo ket gant azened gouez met gant pevar kañval fazhiet ec'h erruas El Madani hag ar pevar den da adstrollañ ar c'hamp. Un draig a levenez a deuas war an dremmoù skuizh ha treut.

Goude un ehan hir e naoz un oued, ar pezh a dud bet deuet gantañ e vuhez en em gave an tri warn ugent a viz C'hwevrer war dreuzoù un endro rangalonus, sec'h-kraz a-grenn, ur mantr, plaennenn Amadghor. Ledet homañ betek an dremmwel, tres ur roud eeun o vont d'en em goll war ar pellder ha setu ar spi bet un herradig kent goude ar chase, o vont war steuziñ, koazhet, un dizesper !

Ar bempvet deiz e plaennenn strafuilhus Amadghor — an daouzekvet dibaoe marv Flatters — Belgacem ben Zebba, eil soudard-mevel ar c'horonal m'edo bet roet dezhañ e sabrenn, a zic'houzougas ganti ur c'hañval. Ar gwad holl bet dastumet, ar c'hig rannet d'an dud e lodennoù ingal ha bet lakaet ar groc'hen da zec'hañ e-sell an dienez da zont. Hogen, re a gig bet lonket re fonnapl en devoa lakaet diaes an dud ha Dinaous a zivizas ober ur c'hamp-red war al lec'h. Daou zeiz war-lerc'h o doa ar spierien merzet an D/Touareged war an tu kleiz ; setu en em renkas ar strollad prest evit an emgann. Souezhet an dud o welout c'hwec'h den meharist, o tougen ur banniel gwenn, manet a-zav ur c'hant metrad bennak diouzh ar strollad ha Dinaous lavarout d'un tennataer Sassi ben Chaïb oc'h anavout yezh ar vro mont en arbenn dezhe gant tri den all. Marteze e kinnigfent bevañs d'ar strollad ? Evit gwir n'edo ket war an tu-mañ e welfent int ar gudenn ! Deuet e oant da adc'hounit ar pevar kañval bet tapet e Temassint anez-se e teufent niverus a-walc'h da lakaat ar freuz hag ar reuz er c'hamp, war o lavar e oant dezhe. War ali El Madani hag ar mokedem, gant ar spi ma chomfe sioul an traoù, ec'h asantas al letanant Dinaous reiñ dezhe pevar kant douro, da lavaret eo daou vil lur.

An daou a viz Meurzh, da deir eur d'enderv edont e kêrig Inzimane-Thiskhsine. Goude ur c'herzh brevus, diyec'hedus war leurenn an douar maenek a droc'he lêrenn ar botoù, an treid o koefiviñ edo bet graet un astal prizadus. Leuniet edo bet ar mirlec'hioù dour, adaozet an tammoù lien war an treid. Un taol-degouezh o doa bet ar Chaamaed dre dapout daou azen gouez dedennet ma oant, int ivez, evel an dud ouzh an dour.

Ar c'hwec'h a viz Meurzh, spierien eus ar strollad a verze edo nepell dioute mestr an D/Touareged war an tu dehou, pelloc'h koulskoude eget hed-tenn ar fuzuilh. An holl dud neuze o doa komprenet, ne oa ket an enebourien tuet da leuskel o freizh da vont kuit. Abardaez-noz toud an dud en doa debret yeottenoù poazh, un druez edo o gwelout marnaoniet, n'edo ket aes dezhe kavout war o zremen un dra da lonkañ pa n'edo nemet maen ha traezh. Ken gwan ma oa an dud edo bet lazhet ur c'hañval, ne chome gante nemet tri loen, un druez o gwelout int ivez. E-touez an dud digiget, an naon a zigas an anoued er c'horfoù,

war an dremmoù, bougennoù kleuzet ar c'heizh-tud, debret gant ur varvenn zruz, daoulagad skoelf, faezhet heñvel ouzh loened oc'h azgoulenn ma vefe berraet dezhe o foanioù. Gant ar selloù prederiek garanet war an dremmoù, hep mar ebet en em c'houlennent peseurt dibenn a deufe da glozañ an afer ! A gammedoù bihan ha difonn ec'h afent evelkent, evel pa vefe pep kammed an hini diwezhañ.

An eizh a viz Meurzh, teir guchennad Touareged pignet war beb a gañval, en em ziskouezas gant tri banniel gwenn. A-nevez edo bet kaset da gannad Sassi ben Chaïb ha tri all gantañ. Lavarout a reas reoù ar bannieloù ne oant ket diouzh an hevelep meuriad hag ar re gent hag e kinnigent gwerzhañ dezhe deñved ha datez. Hag edont poellek ha gwirion ? Pe gaouerien ha trubarded ?

Ar strollad, un druez e welout adgrogas gant ar gerzhadenn diziwezh. Gouzout a rafe Dinaous an dra retañ d'ober edo kuitaat buanoc'h-buanañ al lec'h hurlikus-mañ. Hogen, penaos 'ta en em dennañ, en em zifreañ fonnaploc'h gant an dinerzhded sanket e pep-unan ? C'hwec'h eur edo pa roas al letanant an urzh da chom a-zav e-sell ober un ehan padus ha kreñvaus degemeret mat gant an holl. Petra ober evit ober gwelloc'h ? Magadur d'ar c'horf ha loened da varc'hekaat evit pellaat ar gourdrouz, an hurlink m'edont gronnet ennañ ! Koulskoude, enkrezet ma oa Dinaous, o welout stumm an degouezh, gant pourvezioù dour hanter-c'houllo e touje diouzh an D/Touareged un argad dre souezh ; gwallreuzius e vefe bet an taol ! War gement-mañ edo dizoanius El Madani evel m'en doa dija lavaret : « mestr an enebourien kent skeiñ, a c'hortozfe andonioù ar puñs e Amguid bevonn e zachennad, ac'hann d'ar puñs ne vefe taol-arnod ebet. »

D'abardaez-noz an deiz war-lerc'h o doa an dud bet un tamm koñfort p'edo treuzet gante an dezerzh dizegemerus, didrugarezus ha dañjerus, ken doujet ha staliet o c'hamp tostik da buñs Aïn-el-Kerma, div lev hanter bennak e su Amguid. E-doug an deiz holl, o doa an D/Touareged heuliet ar strollad ha setu m'edont staliet war un uhelenn damdost oc'h evezhiañ fiñvadennoù ar c'hamp. Goude ur mare hir a-walc'h o spiañ, o doa lakaet war wel un tamm mezher gwenn en avelig ha setu un Touareg ec'h unan-penn war e gañval o tont etrezek ar strollad. Ur wech ouzhpenn e tivizas ar jubennour El Madani gant an den ; an datez edont gante du-hont, fenoz e tigasfent an deñved. Sassi ben Chaïb, skoazellet gant tri dennataer, a gemeras penn an hent davet an uhelenn da gerc'hat ar frouezh. Un herradig goude e tistroent gant teir bozellad leun datez. Dinaous a reas ar rannidigezh, pep hini o lonkañ e lod nemet Santin re zerzhiennek evit dezhañ lakaat da ziskenn petra bennak a rofec'h dezhañ hag ar spierien oc'h ober ged. Traezh mesket ha peget ouzh ar frouezh n'edo ket bet ur gudenn evit o debriñ, n'edo ket an ampoent bezañ figus.

A greiz pep kreiz edo an dud deuet evel tud ziskiant dre redek e kement tu, darn o kuitaat ar c'hamp heñvel ouzh tud foll, darn all astennet war an traezh oc'h en em weañ gant ar boan diwar c'hlizi. Al letanant Dinaous a gemeras e bistolenn-dro, a dennas meur a daol, evit adkavout ar peoc'h. O klask gouzout edo. Gwallvantret e kreiz ar c'harmadeg hag ar safaradeg El Madani hag ar Chaambaed o doa kerkent komprenet ar perak deus an drougoù. Buan-tre edo bet lakaet dour war an tan ha dastumet ar re glañvaet evit dezhe evañ dour tomm-tomm par ma c'hellfent betek disteurel ha disteurel. Ar *bettina* ! Mesket o doa an D/Touareged delioù ar blantenn-mañ gant an datez, ur pistri-feuls edo ha lakafe an dud da goll o spered. Pa lavarent n'edont ket eus an hevelep meuriad ! Goude an dreitouriezh-mañ, ne vefe ket da gaout kred enne avat, an deñved a c'hellfe chom du-hont. Dre zegouezh ha dre chañs edo El Madani eno, eñ a ouezas ar remed da bareañ ar c'hontamm.

Kerkent ha gouloù-deiz, war-lerc'h bezañ doujet un argad e-pad an noz a vefe bet terrupl, marvus marteze evit an holl, edo El Madani o niveriñ an dud. Pevar dennataer hag ar mokedem n'edont ken er c'hamp. Ur furchadeg war gelc'hioù o vrasaat, hopadennoù da c'hervel ar re ezvezant ; n'edo ket bet kavet den. Nikun ne ouezo dare petra edo bet o fal ? Ha marv edont goude ar c'horfad frouezh pistrius ? Unan etreze marteze anave hent un dec'hadenn vennak ? Chom a raio an diankadenn hep respont ! Betek gouzout hiroc'h.

Dinaous, o tont ennañ tamm ha tamm ar vuhez, a roas urzh d'an unan ha hanter kant den da stagañ adarre gant an hent. Erru ar strolladig war dremen ar ganienn zigor e tor ar menez Tassili edont tostik ouzh an dour, al lec'h anvet Armand, ur baradozig wirion evit ar c'hlasvez fonnus ha yac'h, evit an dud skuizh-marv ivez, un oaziz. Siwazh ! kant gwech siwazh ! Edo an D/Touareged o stankañ an tremen da vont ennañ, da vont d'an andon salvus. Graet o doa ar re-mañ o vennozh da verzañ oute o saveteerezh, da lakaat ar paour keizh-tud da baeañ ker o zrec'h war an Amadghor. Gant an tan en o gourlañchenn, tud Dinaous, pledet gant aozadur an emgann a-barzh nemeur, adkave koulskoude nerzhioù nevez gant ar gasoni zivent a vagent e keñver oc'h enebourien zaonet.

E teir gevrenn edo bet ingalet an dud en diaraog. En hini kreiz edo al letanant Dinaous, diouzh an tu kleiz Joseph Pobéguin ha diouzh an tu dehou El Madani. Santin, gant ar bihan a yec'hed chomet ennañ, a chomas war an adreñv gant pevar dennataer abafet, n'edont ket c'hoazh yac'haet diouzh binim ar *bettina*, an tri gañval diwezhañ en o c'herz. An dennadenn gentañ a reas da zek enebour disac'hañ war an traezh. Gant nerzh tennañ ar 74 ha bountet m'edont bet, e kilent, en em zouarent e toullou an devenn ha diardreñv meur a roc'h. Meur a vrezelour damguzhet edont bet foeltret gant al letanant hag e dud, lod anezhe ne gredent ket, daoust d'o niver dreist krapañ war bouez-krec'h o c'houzout ervat e vefent dic'houmor. Evit ma spontfe tud ar strollad e vount diraze an D/Touareged pemp den e krec'h an uhelenn ; oc'h anavout ar pevar dennataer hag ar mokedem, diwelus an derc'hent, e komprenas al letanant perak ne vijent ket bet kavet trowardroioù ar c'hamp. Chomet abaf, ne gredas ket al letanant tennañ. Ar pemp den war an uhelenn, staget o daouarn dezhe a vleje, a yude par ma c'hellent, hogen en desped d'o dic'hoanag, d'oc'h aspedennoù, d'o c'heinvanoù edo rediet ar brizonidi a daolioù kleze da vont betek kouezhañ en islonk. Feulzet ma oa al letanant o welout se hag hep soñjal edo riskloù, setu-eñ en e sav-sonn ha tennañ keit ha m'en doa boledoù, hogen, ur barrad goafioù ha tennoù diouzh an tu enep ha Dinaous a-blad ouzh an douar, marv-mik. Alvaonet ha saouzanet da vezañ bet gwelet traoù ken argarzhus, tud al letanant diskredik ur pennad amzer ne ouezent ket petra ober, diwelus ha sioul e choment. Setu ar pezh m'edo oc'h enebourien o c'hortoz. Kerkent gant o goafioù hag o c'hlezeioù er vann ec'h argadent gant an eil arsav. E-touez ar strollad edo bet lazhet pevar den, c'hwec'h all gwallaonet. Pobéguin hag El Madani gant an div gevrenn all a erru d'an ampoent, pennfollet e kil an enebourien en dizurzh en ul leuskel korfoù e-leizh war-o-lerc'h, evit an eil gwech edo bet talet ouzh ar arsailh. Brame a zivizas mont da glask korf al letanant, en desped d'an erbedennoù bet roet dezhañ, dre n'edo ket poellek dezhañ lakaat e vuhez en arvar, netra ne zeuas da ziarroudennañ e vennozh. Hag-eñ en e sav ha redek etrezek ar c'horf, hogen, berr-tre edo bet ar redadenn, ur goafig en e beultrin, setu-eñ a-blad. Marjolet ha tri dennataer, chomet war an adreñv gant Santin, o lammat war du al linenn dennoù a gouezhent d'o zro. Ne vefe ket klevet trouz ar goafioù, an enebourien en o embregerezh hag oc'h ampartiz en desped d'an noz o tostaat a rae dispennoù mantrus ouzh re ar strollad. An tennoù, int a vije klevet, seul taol m'en em ziskoueze un enebour gant e c'hoaf e kouezhe, eñ ivez a yae da adkavout e c'hourdadoù. Gant an noz oc'h astenn he skeud ec'h echuas an emgann war un daolenn druezek, spontus ha sklasus. Ne vefe klevet un disterik a drouz ken e-touez an D/Touareged manet en o zoullou, evel speget ouzh speurennoù an ode, meur a fuzuilh gante da zifenn denesadur an dour. Brezelourien e-leizh o doa kollet, gwelet o doa n'edo ket dre nerzh e teufent a-benn eus ar strollad daoust ma tigreske niver an dud ennañ. Eizh eur da noz, ur Chaambi a zeuas da gemenn e oa marv an ijiner Santin. Ar serjant Pobéguin a zegemeras ar c'heloù gant ur from divent dreist-holl m'edo bet eñ ivez gwallaonet un troad outañ. Un dra all a oa hag a dourmante dezhañ e benn, setu m'edo bremañ ec'h unan-penn eus Bro-C'hall, ret dezhañ ren an dud ha hir c'hoazh hent an distro !

Ambrougadeg an tasmantou

Un hent hepken, da ober o galloud, a chome dezhe evit en em dennañ ha bezañ e surentez. Mont davet Hassi-Messeguem hep tremen dre ar puñs. Koulskoude, e vefe bet un dra vat ober un ehan en ul lec'h ken degemerus, ken plijus ; ober war dro ar gloazioù, tanijennoù ar c'horf, adkemer nerzhioù ha koñfort, chom aze meur a zeiz kent da pep hini stagañ skañv ha mibin gant an distro. Hogen, ar baradozig edo e kreiz an ifern, difennet mont ennañ, pa 'z edo an diaoul oc'h ober ged ! Kent tarzh-an-deiz, rediet Pobéguin da gemer penn ar gevrenn e roas ec'h urzhioù d'an dud. Hep gortoz a-zivout an D/Touareged un argad all, setu m'edont en hent, dic'houest d'ar serjant kerzhout gant ar gloaz ouzh e droad e pignas war ur c'hañval ma oa daou gañval all o tougen ar re c'hloazet. Diouzh Amguid, e lec'h m'edont, betek Ouargla o doa war dro div lev ha hanter kant da ober : mil kilometr. Pevar ha tregont den o vont dindan sklaerder al loar, gant o zreid koeñvadennet, en em stlejañ a raent kentoc'h eget kerzhout. E derou an endervezh e teuas El Madani da gemenn d'ar serjant Pobéguin edo aet diwar-wel pevar den, un tennataer en o c'herz hag an tri all deus meuriad Oulad-Naïl, skrapet gante ur c'hañval, dizertourien marteze o tostaat ouzh o chomlec'h ? Nikun ne ouezo ! A-benn ehan an noz, un den gloazet n'erruas ket gant ar gevrennad. Meur a zen deus ar meuriad Oulad-Naïl a voulhas gant ur vreutaenn diwar-benn ar sec'hier-lêr, ar re-mañ o tamallout an dennataerien da gavout ar re vrasañ ha dre-se ar muiañ a zour. Kerkent e krogas un disfiziañs etreze ; an dizunvaniezh oc'h ensilañ ar speredoù n'edo ket un dra vat evite koulskoude, nag evit ar re-all kennebeut.

Abred ar mitin, an deiz war-lerc'h, an holl dud en hent, ne oa met truilhoù hepken o c'holeiñ ar groc'hen, lod anezhe a gerzhe war o zreid noazh. Daoulagad skoelf dezhe, o divskouarn o voudal, ken divent ma oa ar skuizder. Ur gwalleur bras d'al luguder pa ne chomfe den d'e sikour, pep unan en doa e boanioù da c'houzañv, da zougen, truez ebet ouzh an nesañ. Darbet e vije bet d'an dud en em gannañ ar pemzek a viz Meurzh, an dennataerien o skrapadegañ kañval Pobéguin ; re ar meuriad Oulad-Naïl oc'h ober heñvel ouzh an hini m'edo warnañ ar re c'hloazet. An enebiezh a greske e-mesk an dud naoneget o c'houzañv an diouerioù, n'edo tu ebet ken da lakaat ar c'heizh-tud-mañ da sentiñ. N'edo sanket e pep penn, nemet ur mennozh, saveteiñ e vuhez dre n'eus forzh peseurt doare e vefe. N'edont ket kennebeut a du evit an hent da gemer. Sevel a reas trouz etreze, pa vez an den e penn e neudenn, e par ar marv, ne vez ket aes lakaat anezhañ da sioulaat na da brederiañ.

Divizet edo bet lazhañ ur c'hañval, ne oa ket tev ar c'hig en dro d'an eskern lipet ha peurlipet, hogen, er stad ma oant holl erruet ne oa ket da bismigañ war veur a vegad, ken dister m'edo e lodenn da bep hini. Ur c'hañval nemetken a chome gante, eñ ivez o c'houzañv.

Pobéguin dic'houest da reiñ urzhioù d'an dud pennfollet, ne vije e feson ebet selaouet outañ, hag ouzhpenn m'edo e droad gloazet o washaat, kontammet ma oa hag o koeñviñ, edo erruet evel ar re-all, heuliañ, treuzvevañ dreist an hurlink en hini m'edo.

An deiz war-lerc'h edo bet kollet daou zen gloazet mui un tennataer chomet a-stlej. Diwar vremañ edo tonket, gant reizhder, ar gevrenn da hadañ korfoù marv. An triwec'h a viz Meurzh ec'h erruas ar vandennad da dizhout an oued Tilmas-al-Mra, lec'h m'o doa gallet evañ dour bouilhennek ha sall. Antronoz e krogas an avel dre c'hwezhañ kreñvoc'h pe greñv, ar gorventenn o stlepel hep astal gwagennoù traezh fin war an dud divarrek da zerc'hel o malvennoù digor, ouzhpenn gant ar munut ma oa an draezhenn en em enskante homañ er c'hloazioù. Da bep koulz e rae an dud un tamm sav evit nompas bezañ interet bev, padal, ne c'hallent ket chom pell war zav gant ar c'horc'hwezh hag an avel-dro spouronus. Ret e oa dezhe derc'hel start war ar pezh a zilhad edo en dro d'o c'horf bloñset ha kizidik, ken dantus ma oa an draezhenn.

Eizh eur e padas ar gorventenn. Kerkent ha sioulaet an avel edo ret adstrollañ ar vandenn, pledet pep hini o kendastumm e feadra. Tri den ezvezant n'edont ket bet adkavet, tri

den chomet emichañs dindan an traezh, interet 'pad ar gorventenn euzhus. Goustadik edont o vervel gant an naonegezh, chom a rejont daou zeiz leun diwar-dro ar puñs Hassi-el-Hadjadj. Belgacem a lazhas kañval tud ar meuriad Oulad-Naïl. Evel kent, n'edo ket bet laosket da goll ur vruzhunenn eus an aneval, nemet ar reun e vije. Nebeut ha nebeut e seblantas dont er c'horfoù un tamm kennerzh da boursu ar veaj diamzeret.

An dud dic'houest da gerzhout edont bet pignet war gein an diwezhañ kañval betek ar puñs evite da evañ ul lonkadenn pe ziv mui ober ur walc'hadenn d'o c'horfoù bronduet. An daou dennataer bet dibabet da zistreiñ an dud hag ar c'hañval d'ar c'hamp edont graet o vennozh tec'hout gant al loen. Setu kollet an diwezhañ-holl a zanvez a vije bet rekis da genderc'hel gant an distro.

An tri warn-ugent a viz Meurzh e c'hoarvezas un diviz argarzhus da gemer. Dilezel war riblenn an arroudenn ar re na vefent ket gouest da gerzhout ha hanter gollet gante o zammig spered, ur sac'h-lêr leun dour ennañ e vefe bet roet da bep hini. Tri deiz kerzhed edo c'hoazh da vont betek Hassi-Messegem, hogen, den ebet ne seblante dezhañ kaout an nerzh rekis da vont betek eno. E pad div euriad kerzh oc'h ober un ehan pep kant metrad n'he doa ar vandenn graet nemet tri c'hilometr. An amheuliadenn dasmantoù n'he doa ket ken an nerzh da bilat traezh dre welout hep arsav an dremmwel o tec'hout a-zindan he daoulagad. An daleerien oc'h aspediñ en aner bezañ gortozet pe skoazellet, ne vije ket klevet o fedennoù, deuet e oa an dud evel m'edo al loened, an emgarantez o c'hounit pep den.

D'abardaez-noz peogwir n'edo ket bet dibunet kalz hed war hent ar gwarez e tistreias eizh den betek ar puñs, Belgacem a yeas gante. Antronoz beure mat, e kinnigas hemañ d'ar serjant Pobéguin kig eus an dud c'hloazet bet lazhet gantañ neizeur, heuet Pobéguin en em zistroas. Evit ar re-all, n'edo ket bet ret pouezañ warne da gemer o fred. E-doug an deiz war-lerc'h, korfoù marv tri dennataer hag hini ur Chaambi edont manet da beullinennañ war o zremen, Belgacem a zistroas adarre da seveniñ e labour euzhus hag erezus, o c'hourdrouz gant e c'hleze, nep piv bennak a venne dezhañ e virout.

An noz edo bet skrijus evit ar serjant, dic'houest dezhañ kaout ar c'houk gant e droad krinvreinet deuet da vezañ du ha koeñvet iskis, ne oa ket tres troad un den warnañ ken. Kridiennoù an anoued, an derzhienn o c'hounit tachenn, e kollas Pobéguin an esper da stourm evit saveteiñ e vuhez. Ar vintinvezh holl en doa tremenet o rambreal, oc'h alteriñ hag o horellañ hep soursial diouzh an dud en dro dezhañ, dilavar en em c'hourvezas dindan ur wezennig. An dibenn e oa, ar marv edo deuet da beurglozañ dezhañ e boanioù an unan ha tregont a viz Meurzh, eizh vloaz warn-ugent dezhañ.

Daou zeiz diwezhatoc'h, ec'h erruas ouzh teltennoù Radja e Hassi-Messeguem, daouzek den treut-eskern, skuizh-brein, disec'het, diaes-tre dezhe lakaat un troad dirak egile, kazi dibosupl dezhe lavarout ur ger.

A-zivout lavarou an dud salv edo bet graet enklaskoù war heñchadur ar vandenn hag adkavet pemp den war-nes tremen ha meur a gorf divuhez.

Setu ar pezh a chome diouzh kefridi Flatters.

Ur gerig ouzhpenn

Goude degouezhioù ken reuzus, e tivizas Kuzul-Kêr Klegereg ober ur savadur da gounaat ouzh an dud, evit ma ne gouezhfe en ankounac'h bugel ar vro. Ar savadur war blasenn e kreiz ar vourc'h a zo bet reizhet gant intrudu ec'h amezeien, e genvroidi, e rejimant an 3et Spahis, gant skoazell ar Stad ha skolidi lise Pondi. Dremm Joseph Pobéguin en ur c'helc'h-medalenn war ar savadur a zo durc'haet e sell etrezek e di genidik, e-lec'h ma tigoras e zaoulagad an daou a viz here 1853.

Digoridigezh ar savadur a c'hoarvezas ar c'hwec'h warn-ugent a viz gwengolo 1882.

Remi Fraboulet (genver 2020).